

KANTIK SPIRITUEL

E GLOAR DOUE HAG INTROUN VARIA KERDEVOT

E deuz eur chapel gaër e parres Ergue-Vras, e kichen Kemper-
Korantin, e pehini e ra bemde miraklou bras.

Vos omnes sitientes, venite ad aquas.

C'houi oll pere oc'h eus sec'het,
Deut da eva d'ar feunteun a vuez.

Var ton : *Santes Mari.*

Tad, Map ha Spered-Santel, tri Ferson e Doue,
Me ho ped a vir galon hag a greis va ene,
Da zirija va memor ha va ententamant
Ma rin brema eur c'hantik d'ar Verc'hez puissant.

Biscoas, Kristenien, siouaz ! n'hor boa brassoc'h ezom
Da bedi Mamm hor Zalver da gaout truez ouzomp,
Ha rei ar c'hras d'hon Roue da veza galloudus
Var he oll enebourien ha re he Map Jesus.

Tristidigez a velan, allas ! pell zo er bed,
Kernez hon euz bet ive commancet da velet,
Ha monet a reomp bemde d'ann enterramanchou
Demeuz a dud hor c'hanton, kouls ha d'ho zervichou.

N'e deus nemet ar vocen n'on deus ket c'hoaz gueleet
Etouez tud paour ar vro-ma, Doue ra vo meulet.
Pedomp an Drinded Santel hag ar Verc'hez Vari,
Ma vezimp guitibunan diouallet diouthi.

Ar voien d'en em assuri euz ar guir joausdet,
Ha possedi da james eur peoc'h hir ha parfet,
Eo suplia ar Verc'hez da bedi evidomp,
Pa na veritomp siouaz ! 'zelfe Doue ouzomp.

Meur a blas santel dezhi er bed a zo savet
Elec'h ma z'eo enoret, karet hag invoket,
Dre ma ro Doue enno, dre h'intersession,
Grassou bras d'ar bec'herien p'he fedont a galon.

Ne fell ket d'in dikrial iliz santel ebet,
Gant an dud vad kouskoude 'laran gant lealdet
Ema 'barz enn hor c'hanton ann iliz devota
E deuz ar Verc'hez Vari ha zoken ar gaëra.

Komz a ran d-ehoc'h, Kristenien, eus an templ beniget
Tost da Gemper-Korantin, Kerdevot eo hanvet,
Zo bet savet d'ar Verc'hez dre vir devotion,
Hi eo ann iliz kossa he deveus er c'hanton.

C'houi, Ergeziz-Gaberic, eo o peuz ar gaëra
Demeuz ann oll densoriou a zo var ar bed-ma,
Rak c'houi o peuz ar zoursen demeuz ann oll grassou
Elec'h ma erru bemde aleiz a viraklou.

Komz a rer d'euz eun histor verit beza kredet
Penaos ar Verc'hez Vari, 'vit ma vije gouezet,
Tro-var-dro er c'hantoniou santela plas a voa
Lec'h ma glevje ar pec'her gant karantez ha joa.

Ar Verc'hez a lavaraz d'eur munuser iaouank
Ober dezhi eul labour hag a vije divank,
Hen ober euz ar c'haëra a elje da ober,
Hag enn env vije paët gant Jesus he map ker.

Pa vije achu ganthan, hen lakat enn eur vag
Var ar mor bras kounnaret, selaouet ar mirakl !
Ha Doue her c'honduje d'ann devota iliz
A voa d'ar verc'hez Vari savet enn hor Breiz.

Pa voa var ar mor guelet, zirede kalz a dud,
Beleien ha fablijen da glask kaout ar burzud ;
Mes ne dostaaz ouz nikun ken na voa var ann od
Person Erge d'he c'hemmer gant fabrick Kerdevot.

An tam labour-ze neuze d'ann douar a dosteaz,
Ha fabrik mad Kerdevot hep poan he gemeraz.
E Kerdevot voa rentet gant eul lid vras meurbed,
Ha laket var ann aoter d'ann oll dud da velet.

Evuruz bras o kavan, habitantet Erge,
Da veza dre breferans da oll dud ar c'hontre,
Enoret deuz eun iliz ken kaër ha ker santel,
Mammen ann-oll miraklou ha grassou eternel.

Paressionis Elliant a ouffe lavaret
Peger santel ar plas-ma d'ar Verc'hez beniget ;
Na dlefent ket dizonjal ar rest euz ho bue
Ez int dleourien brema da Vari, mam Doue.

Ataket oant bet gueichal gant eur c'hlenvet kruel,
Gant ar vosen belimus, mont a rent da vervel,
Ker stank a varvent bemde ken na vanke loanet
Ha kirri d'ho c'hass d'ar vorc'h d'ann douar beniget.

Pa veljont an danger bras a oant oll da vervel,
O devoe recours d'e-hoc'hu, Guerc'hez sacr ha santel !
En em voestla a rejont gant guir devosion
Da zonet da Gerdevot gant ho frosession.

Er moment ma partijont eus parres Elliant,
Da vonet da Gerdevot, o doa soulajamant,
Rentet pare ha dispos, ha iac'h eus ho c'hlenvet :
Guerc'hez gloriüs Vari, ra viot beniget !

Ober a rejont neuse eur veu a vouez huel
Da zont eur veich bep bloaz da Erge d'ho chapel,
D'ho trugarekat, Guerc'hez, evit ho toneson
Nobl, beleien ha partabl gant ho frosession.

Meur a zen zo bet lazet ha var ar mor beuzet,
Dre ho kalloud, o Guerc'hez ! zo bet ressusitet.
Kals a dud dre accident privet euz ar guelet,
O deuz bet e Kerdevot ar sklerijenn kavet.

D'an dud troublet ho skiant ha zoken sot rentet,
E Kerdevot peurvuia e kavont ar remed ;
Hag an traou a ve laëret, pa vent goestlet dezhi,
Na ell ket e nep feson al laër ho zransporti.

Davantaich an nep a gouez, siouaz ! en accident,
Pe dalc'het var ar guele gant klenvet languissant,
Ve guelleet e Kerdevot, pa deuont a vir galon
Da c'houlen digant Mari e intersession.

Er paressiou divar dro niver bras a gerriou
En danger da ve laket e poultr hag e ludou,
Dre eun tan euzuz, siouaz ! a zo bet sikouret
Er moment ma z'int bet d'an templ a Kerdevot goestlet.

Beza z'euz tud var ann douar pere dre eun domaich,
Pe dre eur fortun bennak a goll prest ho c'houraich,
Pe ma z'int bet pell amzer gant klenvet languiset
Pe zoken trist glac'haret kazi disesperet :

E Kerdevot a gavint ar gonsolation,
Elec'h ho zristidigez, mar deuont a vir galon,
Prosperite er bed-man, er bed all joausdet,
Rentet joaus ha kontant, ha parfet a speret.

Ouspen ar groagez brazes, pa vent brassa e poan
O klask lakat er bed-ma ho bugale vian,
A ve barz e Kerdevot diboaniet hep dale
Dre skoazel vad ar Verc'hez : meulet ra vo Doue !

Mes betek vrema ne m'euz lavaret c'hoaz netra :
Setu ar c'haëra mirakl hag ar principala,
Ar bec'herien kaledet a jench oll ho goall stat
Pa ve pedet evitho ar Verc'hez, ho mam vad.

Me a brouvo kement-ma dre ar personachou
Zo bet ganthi sikouret en ho neessiteou.

Me zesko d'hoc'h sklaeramant kement a m'euz laret :
Klevit attantivamant, m'ho disklerio d'-hoc'h net.

Eur zoudard euz a Gemper hanvet 'nn Aotrou Deschamps,
O visita Kerdevot er c'horais divezan,
En deuz laret d'ar fabrik e z'oa bet sikouret
Gant Mari enn e gampaign er goan-ma tremenet.

Ar zoudardet a voa bet gant ann Aotrou Dugay,
Na allent ket rankontri an hent da zont d'ar ger,
En danjer da ve kollet var ar mor perillus,
O deus bet en em offret d'ar Verc'hez gloriuz.

Deut int d'he zrugarekat, pa int deut da Gemper,
Ha roet dezhi e presant eur chapelet ker kaër,
Ha roet c'hoaz kalz offransou gant guers oferennou.
Soutenet-hi c'hoas, Guerc'hez, en ho oll kombajou !

E miz c'huevrer diveza, selaouet, me ho ped,
Eun den a dreo Langolen, euz a barres Briec,
O vont gant he varc'h eun deiz d'ar foar da Gastellin,
Voa var ar poent danjerus en eur ster da veuzi.

Dre bermission Doue e arruas eun den,
A velas o vont oc'h traon gant an dour marc'h ha den,
Var he zaoulin e stouas, da Vari o gouestlas,
En he zi e Kerdevot ebarz enn Erge-Vras.

Prest 'voant da veza maro pa voant gouestlet dezhi,
En instant ma int gouestlet, sikouret int ganthi ;
Eun dra, eme an den-ma, dre bermission Doue
Evel eur voger kre bras ho arretas en Ee.

Eun niver bras eus a dud a Gemper-Korintin,
A barres Sant-Evarzec, hag a Erge-Vian,
A Erge-Vras, a Vriec, a barres Kerfeunteun,
Demeus a barres Elliant hag a barres Cuzon,

Deuz ho c'hlenvejou marvel a z'int bet delivret ;
En ho afflicsionou a zo bet konsolet ;
Deuz a fleuresi, tersien, pourpr ha pep seurt klenvet,
Hag ebars e Kerdevot 'deuz kavet ar iec'het.

Eur belek 'voa ginnidik a barres Erge-Vras,
En doa bet e Kerdevot eur iec'het c'hiz biskoaz,
Gouskoude pad pemp sizun voa bet var he vele
Dilavar, abandonet gant kement her guele.

Eur vourc'hizez a Gemper, siouaz ! dre accident
Rentet mudes pemzek de, privet euz ar parlant,
Zo bet guestlet en Erge d'ho chapel beniget
Dre ho krass, Guerc'hez santel, e deuz bet prezeget.

Euz a Erge-Gaberic eur vreg borgnes rentet
Gant eun taich var he lagat, savet dre eur c'hlenvet,
E Kerdevot her guelc'haz gant an dour souveren,
Euz a feunteun ar Verc'hez, m'he devoa sklerijen.

Breman euz bet unnek vloaz da vouel ar Chandelour
Gant kurun hag avel-foll e voa kouezet an tour,
Ma voa surprenet eun den, allas ! dindan ar vein,
Daouzek karrat assuret a voa kouet var he gein.

Kouskoude e voa klevet o krial, o lammet,
Oc'h en em rekommandi d'ar Verc'hez beniget,
Ma voe dre ho kuir sikour ac'hane delivret,
E oll izili torret hag he gig dispennet.

Ar biana euz ar vein a voa gouest d'he laza,
Pa ne m'oc'h euz bet miret, ho Intron Varia !
Ma kovesseas, ken mervel, gant keuz d'he bec'hejou ;
Breman en deuz ann enor d'ho kueleter joaou.

Eun den a barres Elliant prest da goll he broces
Gant eun amezek dezhan, dre eur guir traïtours,
A zeuas da Gerdevot da visita Mari,
Gouneet en deus he broces dre voien anezhi.

Eus a Erge-Gaberic eur vreg fur ha prudent,
E deus bet dre eur c'hlenvet kollet he jujamant,
Mes ken terrubl ken na voa ret d'he amezeien
He diouall hag he staga en he zi gant kerden.

N'en deuz den var an douar ker kalet a galon,
He guelfe er stad trist ma hep kaout kompassion,
O chanchat var bleo he fenn, hag o strakal he dent.
Ma Doue, en zo terrubl koll ar guir sklerigen !

E fried hag he c'herent ouz he c'honsideri
Na zebre, na ne eve, torret he izili,
Difiguret he bizaich hag he zellou troet,
E gouestlas e Kerdevot d'ar Verc'hez beniget.

Incontinent he deuz bet skiant a neve flam,
Jesus ra vo beniget, ar Verc'hez sakr he vam !
Hag he deuz testamantet eur vros euz he dillat
Da enori ar Verc'hez ha d'he zrugarekat.

Ar groagez a ve poaniet en ho guilioudou,
Zo sikouret gant Mari, bemnos, bemde-c'houlou,
Hag ho bugale vihan, pa vent sempl, languissant,
P'ho rekommander d'ezhi, o deuz ar vadiziant.

Ho feunteun, Guerc'hez Vari, a zo bras he effet,
Guellaat a ra d'ann derzien katar, pep seurt klenvet,
Davantaich, ouz he skarza, he deuz pep magerez
Da vaga ho c'hrouadur abondans euz a leaz.

Dont a ra da Gerdevot bep guener er c'horañs
Un nombr braz a dud devot, bep sul, bep gouel, bemdeiz ;
Pedet noz-de ar Verc'hez ma o kuelo er gloar,
Gant kement a zo devot dezhi var an douar.

N'en deuz ket ken aliez a ze ebarz er bloa,
Evel a ra a virakl ar Verc'hez Varia ;
Mar fell d'e-hoc'h en approui, en em rekommandet
E Kerdevot da Vari, pa viot afflijet.

Konsiderit, Kristenien, pa erruet en he zi,
Emedi he Map Jesus etre he divreac'h ganthi,
Evel pa e deffe desir d'he rei da vriata
D'ar belerinet devot a zeu d'he bisita.

Va breudeur, va c'hoarezet deut eta gant fizians
Da Gerdevot beniget, karget ho koustianz,
Kovesseet ho pec'hejou, recevit korf Jesus,
Ha goalc'het ho kalonou en he voad presius !

TAOLIT EVEZ.

N'em euz ket skrivet ger evit ger ar verz koz-ma, na ken-
nebeut en he hed. Eun devez bennak marteze, e lakin e moulla
evel m'am beuz he c'havet hag en he hed.

[Dre ar verz-ma e velomp, e voa karet ar Roue gant hon tud
koz hag a bedent evithan pa voa trubuillet.

Ni Bretouned, ho bugale vian, a dlefe ive karet Herri V, ha
pedi ma teui aberz Doue, da zigass d'hor bro, ar Frans, ar
peoc'h hag an urz vad, eleac'h an dizurziou-man on deuz da
c'houzanv aberz ar Republik fallakr.]

Ouzpen ar c'hantik-man, e gaver c'hoaz, e Kemper, e ti
Iann-Per Gourlay, ru ar Brovidans, n^o 19 : 1^o *Guerz ar
Veleien Gatolik* (respount d'an Doue Arc'hant), gant hini
an *Tunisi* ; 2^o *Jesuistet Kemper* ; 3^o *Ann oll Dadou Reli-
jiuset* ; 4^o *Eur Belek dal*, gant *Kantik Sant-Frances-a-
Sal.* — Dek real ar c'hant, dre ar post ; pemp real ann hanter
kant ; eiz guennek ann dousen.